

BUEZ

Santez Genovefa a Brabant

Var eun ton ordinal

Mero suppli compagnunes,
Da glevet cana eur vuez,
Da Genovefa a zeo gred,
Melezour d'an bitronezet.

A Vrabant e oa guinidic,
A lignez nobla pinvidic,
Christenez mad a voa ive,
Gwir servicherez da Zoue.

Pa voa en he bugaleach,
Hi a gare an han hermitach
En eur c'horn a jardin e zad,
Ne met eno n'em gav er vad.

He mamm ouz e c'honsideri
Eun deiz ac'houlennas outi ?
Penos, va merc'hic hermites ?
Ha na deuet-hu quet d'ar palez.

Va mamm e cornic ho jardin
Me a meus eur boquet divin ;
M'em meuz eno eur melezour
An autrou Sant-Yan-Badezour.

Allas ! va merc'hic emezi,
C'houi n'en noc'h ket evit souffri
Ebars en dezert e zeus poan
Ne adurfec'h quet a gredan.

Kæroc'h egued fourdilizen
E voa ar plac'h-mà a dra certain,
Quen a deuet da vit e foltret
Da gass d'an noblañc da velet.

Eur palatin, Sifroi hanvet,
He renomme e deus clêvet,
Hac a zisquennas en Braban
Gant eua equipach excellant.

Ractal vel ma oa erruet
En ty e zad he n'em rentet
En em brezantas er pales
Saludi ar Princ hac ar Brinces.

Goude o beza saludet,
E menud n'eus goulennet,
M'en vije ar Brinces yaouanq
Qu'en eguet monet da Vrabant.

He zad dont da gonsideri
E voa avantajus ar parti
A roas karg d'e mamm neuze
Da c'hout a hi zimeje.

Va merc'h prest eu em preparet
Eru zo eur Princ d'ho quelet :
Eur palatin a voad huel,
Quendea gomdez d'an Impalaër.

Me nemeus nemet seitec vloaz,
Ha dre ze hon re yaouanq c'hoas
Ne non c'hoas nemet eur bugel
Da vont da suit an Impalaër.

Evel an eol pe ar c'hristal,
E c'hantreas ebars ar zal,
Ar palatin zo estonet,
O consideri e guenet.

Gant honor a perseveranc,
Ec'h eus dezan ar reveranc,
He furnez hac e modesti
A boe meurbet d'he fantasi.

Mas pa voa parlantet dezi
Var ar sujet da dimezi
E chanchas a liou e bizach,
Ar palatin e remarquas.

Ne ouffe den consideri
Peguement a velancoll
A conserve ar palatin
Gant aoun kaout refus diouti.

Eur mis anter eo padet
Solenniteo an eured,
A sonnerien, ar bal, an dans,
Visito bennde gant noblañc.

Sifroi c'hui oc'h eus eurejet
Ar gaëran demeus ar merc'het
Evit monet ganec'h d'ho ty,
Diqualit ne debe annui.

Biriquen annui ne devo
Evit queit a ma vezi beo,
Ne quet evit cavet annui
E c'houlennan da zont d'am zy.

Sifroi o vezo preparet
Da zont da Trevez quet o haïed
A voa gant e dad recevet
Gant calz a joa hag a respect.

Daou vlavez anter ezint bei
Hep bean gant netra tourmantet
Bras e voa ar fidelite
A voa entre a daou bried-se.

Quen a deuas Abderam,
Eun adversaour bras da roue,
Da brometi a dra certain
Massacri an oll gristenien

Biscoas distruch ar zoudardet
Evit eur vech na ve goelet
A dal Sodom a Betsabe
Betec Tour e bab e arme.

Tri-uguen mil zoudardet,
Ha daouzec mil a zragonnet,
A voa gant Martel dirac Tour
Ha c'hoas e c'houlennan zicour.

Scriffa e eure d'ann noblañc
E Allemagn, a Spagn, a Franç
Dont assistan Charlie Martel.
A voa general er brezel.

Sifroi, unan a re vrassan,
A varche ive da gentan.
Hac e voa deus discrifet
Monet gant ann Allemagnet.

Siffroi a lizer pa welas,
Genovefa o confias
E dieguez, e oll vadou
De gonfident hanvet Golo.

Neuze pa voa prest e arme
E bartias en hano Doue
Hac e voa gant Martel recevet
Gant calz a joa hac a respect

A drugarez an Eternel
A deu a victoir gant Martel
Abderam zo bet lazet
En Tour hag en oll zoudardet

Pa voa achu ar gombat-ma
Da velet e Genovefa
En deuz digasset Siffroi
E zijenti hanvet Lanfroi

Itron sétu aman kélou
Lizerou digant an aotrou ;
Er paquet e zeus eur presant
A dal eur som bras a arc'hant

Lavraret a ra d'an itron
Ez ann outraou da Avignon
Ha da Narbon evit quemer
Roue bras a Sarasinet

Evel ma clevas quemen-se
E ze c'hoas d'an arme
E scifas buan re Lanfroi
Eur lizer goel drist da Siffroi

C'honi Siffroi a zo en arme
En danjer braz eus ho pue
Mes ho Genovefa a zo
En quen bras danjer gant Golo

Pedevret ne meuz quet c'hoant
Prononci comzo insolant
Me larvafe ar propositiono
A gleo an itron gant Golo.

Golo a voa eun intendant
A voa bembe comunament
En compagnunez an itron.
En despet d'he opinion.

Toll evez papillon bian
Hac na vez losquet gant an tan
An tan euz an impurete
A zo nez kalon nos a de

Na sonjfes en devotion
Hag en modesti an itron
Ne laques da speret
Da garant nep a skaro quet.

Pa vel ervat ar mechant ma
N'el quet deceo ar Brinces man
Ar soupçon en deveus sonjet
Laquet e calon e fried.

Ama eo guelec an impi
O commanc c'hoari e drajedi
Ember velfet c'hristenien,
E oll dreitourach pen-da ben.

Eur c'heguiner a voa en ty
A bel a voa o zervichi,
A voa karet gant an itron
Abalamour m'oa d'en guirion,

Rei a eure an intendant,
Dar c'heguiner commandamant
Montd'hec tamb pa vije cousquet
Hac e laquet o c'hemeret,

Caër o doa an daou innoçant-se
Qement an doar hac an év
Da zonet eno da destou
Euz ann dreizourezou Golo

Allas ! Allas ous ar gibet
Mervel paour quez, e vezo red
Ni a rai pinijen hon daou
Eus an dreitourezou Golo

Quemeret voa ar c'heguiner
Hac en laquet prisonnier
Genovefa a voa laquet
Ebars en eur gambr alc'hueet

Eno e gombate oute
Abalamour de chastete,
Scrifa ra Golo lizerou
Ha cass messenger d'an autrou

A lavaret avoa decevet
Gant ar c'heguiner he bried
Scrifa eure an autrou
Da laquat Drogan d'ar maro

Laquat Genovefa ive
Er prison quen ma eruje.
Pa ve bet pomb mis er prison
Neuze vouilloudas an itron

Hep sicour na goulou, na tan
Hi a chanchas e mah bian
Incotinant ma voat ganet.
E gristenien e deveus gret

Gant aoun na varre diganti ;
Hac en he hanvas BENONI.
Sevel a re Golo ar vrud
Communament e toues an dud.

Penos Siffroi a vo beuset,
O sonjal cavet e bried
Cassa a enre e vagueraz
Da c'houlén digant ar Brinces

Ma carje dont d'he eureji
E roje liberte dezi
Ar zantez a voe quelennet
Gant ar rouanez deus ar bed :

Ebars e gampr pa entreas
Eur façad dezan e roas
Ennes oa tol al leadet
A voa da Siffroi prometet !

Ma vijes fidel emezi
Pa voas laquet da vestr en ty
Te a vije recompenset,
Pa vije eru va fried

Arriout a ra lizerou
E tistro d'ar guer an autrou
Pa gleo Golo e teu ar c'hont
E za da Strasbourg d'be rencontr.

Mont a ra 'da dy ar sorcerez
Hac a voa c'hoar d'ar vagueraz
Hac red dezi aour hag arc'hant
Qement a ma vije content.

Me meus eur meleour ardant
Eme ar sorcerez mechant,
Hac rei da Siffroi guelec
Ar pez n'em deo c'hoarvezet

Pa voa zur demeus he affer
E zas joaüs ebars en kaër
Ma voa gant ar c'hont recevet
Gant calz o joa hac a respect,

Neuze e tennas a gostez
Da c'hont outan a virionez
Var ar sujet eus e bried,
A rent e galon contristet

Golo a lavaraz dean
Ne doueti quen emezan
Demeus e infidelite,
A zo drejadi d'ho bue

Ouspén e me an den mechant
Me aneve eur vreg vaillant
A ziskello en ho presans
Quemen zo gret en hoc'h absans

Siffroi neuze ous e glevet
A so contantet e speret
Evel darn deus ar gristenien
O tont, da gredin sorcierien.

Monet a reont assambles
O daou da dy ar sorcerez
E eun toul dindan an douar
Elec'h na oa na eol na loar,

Ar sorcerez a allumas
Diou c'holoen gaëra a goar glaz
Leiz eur bezel demeus a zour
Laquat dindan eur meleour,

A ra dezan teir guech guelec
Ar c'heguiner gant e bried.
Neuze ec'h ordren da Golo
Da vont d'he laquat d'ar maro

Hic hac he mab Benoni,
Ro de ar maro a guiri,
Golo sur demuez e affer
A sistroas joaus d'ar guër

A lavaras d'he vagueres ;
Gret ar vec'h-ma eus ar Brinces
Roet e setanç e fried,
Evid ma vije distrujet :

Hi ha e mabic Benoni.
A varvo sur em fantasi.
Eur plac'h yaouanc a'voa en ty,
Eur verc'h dezi o zervichi

Touchet euz a gompasion
A ias da gavet an itron.
Allas ! emezi ma mestres :
Gret ar vech ma eus ho puez ?

Deut ar setaus gant Golo.
Evit ho laquat d'ar maro.
Lavarit din ma mignonez
Petra vo gred d'am bugel quez ?

Allas ! ma mestress emezi,
Mervel rañ quercouls a c'hui
Va mignonez, ma am c'heret
Grit eur blijadur em reget

Digassat din liou a paper,
Evit ma scrivin eur billet,
Evit ma scrivin eur lizer.
Da laret adieu d'am bried !

Pa vezo Golo o coannia
C'hui ello monet da vita,
Hac en deuler em c'habinnet
Eur c'houlis bennac e vo cavet.

Adieu, emezi, ma bried,
Me ia d'ar maro en ho reget :
Biscoas nemeus gret resistans
Da souffri d'och obeissans.

Rei a eure an intendant
Da zaou vevel commandamant
En eur c'hoat donet d'ho laza,
Ha sigas ho zeod deza

Sevel a eure quent an de
Ha cass' gante an daou den-ze.
Pa voent erruet er prison,
E voa divisquet an itron.

E ront dezi var e zro
Eur goz ventellie d'e golo
Pa voant erru ebars er plas
Unan a den eur gontel noas

Evit laza e Benoni
Voa entre e diouvec'h ganti
Ne doa lavaret guir a bet :
Neuze e gommansas prezeg

E za d'an daoulin diraze
D'o supplia en hano Doue
He laza quet he bugel
Ne renqe quet diou vech mervel.

An daou servicher gant truez
A lezas gante o buez
Ha goude ho zrugarekat
Ec'h antreas don eur c'hoat

En eur rivier pa dremenas
Diamant Siffroy he gulas
Da redeç gant an daou roulant
Pa voa kaus demens ezourmant

Evit emezi n'am bo quet
En bed fesson poan o velet
Ar merq se eus hon union
Epad or separation

An diou noz quenta e zeo bet
Dindan eur derven ho cousquet
Hep souffri na poan nae ennui
Nemet damant d'he Benoni

Eun dreuz e voa o c'hlevet
Pa en em gavas dilezet
Allas ! emezi, ma bugel
Er vech ma e renquin mervel !

Guerc'hes Vari petra a rin ?
Ne meas mui a lez em peultrin
Ne de gantan nemed ar goad !
Ne gav mui eur strill a lez mad

O va Doue oll buissant !
Ho pet soign eus an innocant ?
Roit dezi ar man da sebri,
Vel ma roit d'ar malvrini.

Neuze e tisquen a Vere'hez
Er c'hoad, da gavet ar Zantez,
Da zigas desi eun heizez
A voa d'ho bugel magueres

Quemeret e madic c'bristen,
Ha dent da guichen ar feunten ;
Cetu aze dec'h eun heizez
A voe d'ho bugel magueres-

Ar bleiz, ar loenen mechant
A voe deze obeissant :
Bemdez e teuent d'he caori,
Ha da renta bisit dezi.

Er c'hoad e voa eur porc'hel gue
A deue d'he goelet bemdez,
Da durniai au douar dezi,
Da gavet queler da rebi.

Pa voa an daou vloas tremenet
Eun Æl a zo deut d'e guelet,
Hac a ro dei eur groas arc'hant
Hac enr crucifix olifant,

Courach, va merc'h nas cuisit quet
Eun dez arruo vit delivret :
Preparet eo a gurunen
A ielo eun devez var ho penn

Pa voa ar bemp bloa tremenet.
Da wel eo en em laqet ;
Var e daoulin dirac ar groas
Evelen outi e gomzaz :

Pedos emezi ma Doue !
Hac er c'his ma e chomin-me
Hananeke ta walac'h pembbloas.
Da veza bet ar poanniou bras

M'am bet tanet o ilisiou,
Ha renverset ho auterion,
Eni bije ho coler apeset
Gant an daelo a meus scuillet.

Petra va Doue a meus gret
Da veza quen abandonnet.
Dija a meus encourajet
An usach am boa da brezec.

Mæs mui tra a gresq va foan
E c'heo ma bugelic bian.
Ar grucifi dre virac'h bras,
Evelen outi a gomzan :

Ha me va merc'h petra mens gret
Da veza ous eur groas staguet ?
Guir eo ho mab a gresq ho poan
Va hini n'en de quet bian

Guelet, ma Mam, Yan, Madalen.
Rannet hor c'halon em c'hichen
Cetu ar santez consolet
Gant ar voez Zalver ar bed ,

Ne c'houlen mui nemet poaniou,
Hac ar c'bruela tourmanchou
Pa voa eun devez an Autrou
O sellet eus a baperon,

Ec'h erruas gant ar billet
E devoa scrivet e bried.
Na ouffe den consideri
Er c'hlaç'har ; e velanconi.

Tost e d'he galon ranna
Pa lennas an tam paper-ma
Siffroy na neus mui a repos,
Na all cousquet na de na nos ;

Gant eur voez en lavares deza,
Te zo eun den a c'bruela ;
Te peus lazet da vab ena
Ha Drogan, ha Genevefa

En em lakat a ra express
Da vont d'ar chass eun devez
Na ma rencontras eun heizez
En rentras en cond ar gontez

Er c'havern eo en em dec'hed,
A dreiz quein a Zantez cuzet ;
Sifroi a vea estounet bras
Form eun feumeulen pa velas,

Pa velas form eur feumeulen ;
Hac eun heizez en e c'hichen,
Eur voez a lavaras dezan :
Sifroi, Genovefa homman,

Perac oc'h aze er guis-ze
Er form-ze gand a leonet goue ?
Me zo eur yreg eus a Vrabant,
A zo seiz vloas zo en tourmant.

A zo seiz vloas on retiret
Gant aou rac coler va fried
Greg a Vrabant d'in lavaret,
O c'hanoc'h-hu pe ano a ret ?

Genovefa a voant hanvet,
Eur palatin voa ma fried,
Kri vije r'c'halon na velje,
Tost da c'havern neb a wije.

Guelet ar Princ hac ar Brinces
A semplet o daou assemblet,
Ha pa voant o daou disemplet,
Ar Princ goulen eus e bried.

Pelec'h eman ar c'houadur
En deus eun tad quen disatur ?
Sifroi a dre c'bras Doue,
Cetu e' agnerez aze...

Incontinent pa zistroas,
En e c'hichen en eur c'havas,
Hac en dornad queler ganta
Da rei d'he vamm e vit leina,

Ordern a ra da vevellou
Mont da guer da vit habijou,
Hac eur c'haros equipet mad ;
Evit donet prest d'ho c'herchat

Bevet ho deveus assemblet
Eur bloas gant calz a zantelez,
Genovefa a zecedas,
Ar Princ hag e vad a ehomas.

Ma ejont o daou e assemblet
Da dremen o rest ho buez
Da plas ma voa Genovefa
D'ober plijen a vrasa.

Genovefa, ni ho suppli
Da gavet sonj ac'hanomp-ni
Troit divarnomb an teir goalen,
Brezel, quernez, hac ar vocen.

